



258.009/28

# KLOAREC KOAT AR RANNOU

HA

## PENN-HEREZ KERZANTON



War don : Kurunen aour ha perlez ann Itron Varia Rumengol

### Karantez ha glac'har !!!

I

Tud isouank a Vreiz-Izel, didoztañ da glevet  
 Ar recit euz va dañlou ha va foaniou kalet :  
 Me so eur c'holoarek isouank a eskopti Kemper  
 Am boa choazet eur vestrez enn eskopti Treguer.

E c'harz ar mor oñ ganet e bro sant Gwenole,  
 Ha biskoas nemet glac'har n'em euz bet em bue :  
 Glac'har ha guir garantez, setu va flaneden,  
 Planeden rust na kalet da heulia penn-da-benn.

Pa oan em bugaleach va mamm baour aliez  
 A lavare d'in : « Va mab, kar ha ped ar Werc'hez,  
 » Ped anez-hi, va mabik, ped Gwerc'hez Remengol,  
 » Mar he fédez a galon, biken ne di da goll. »

Patronez va mamm dener, Gwerc'hez va Remengol,  
 Pet gweach oc'h euz-hu miret na douan me eat da goll !  
 Ho pedet am euz bepret... breman arok mervel,  
 E kaninn ho meuleudi d'am breudeur Breiz-Izel.

II

Pa gimiadiz dioc'h va zud, pa ziz pell eus ar ger,  
 Evit mont war ar stadi e skolach Landreguer,  
 N'em boa nemet pemzek vloa, me a wele dourek,  
 Rag evidon ne voa ken, allaz, a surustet !!...

— 2 —

Ô tostaat oc'h Landreguer e kaviz eur plac'hik,  
Koant vel eun elik Doue, he hano oa Metik,  
D'ar gouent e zea ive, evel d'oa d'ar studi,  
He c'halonik oa mantret kement ha va hini.

» Salud deoc'h, plac'hik iaouank, a lavariz dez-hi,  
» Evel d'oun oc'h ankeniet o kuitat tud ho ti ;  
» Ho tornik flour em darnik lakit gant karantez,  
» Hag e vezimp eurussoc'h o wela assamblez. »

Ar plac'hit a lavaraz : « O klearek Gwenole,  
» Pedomp Doue aliez ann eil 'vit eguille :  
» Er joa koulz hag en anken d'alc'hit sonj a Vetik.  
» Euz a vremen da viken e vo ho mestrezik. »

» O Metik, va c'harante, rozen gaër Breiz-Izel !  
» War ho mignon Gwenole toht bremañ eur zell,  
» Eur zell digant ho lagad a raf va eurstet  
» Keit a ma lezo Doue ac'heon war ar bed. »

Erru e kear Landreguer, erru e penn hon hent,  
Me oe kasset d'ar skolach, ha Metik d'ar gouent ;  
Ann disparti oe kalet, c'huero hag ankeniuz ;  
Ann eurstet, er bed man sionas ! n'eo ket paduz !...

'Tre ma chomiz er skolach, skeuden dous Metik kez  
Enn deiz, en noz dirazon a doue aliez,  
Neuze e peden Doue ha Sent koz Breiz-Izel  
'Vit ma vije he bue laouen, euz, santel.

### III

Pa oe ec'hu va studi ez iz da Remengol  
Da bedi c'hoaz evit-hi Gwerc'hez vad Remed-oll ;  
Seiz tro a riz d'ann aoter, devez ar padon braz  
Ha seiz tro d'ann Iliz sakt war beñ va daoulin noaz.

Goude ann oferen bred, ô pebeuz levenez !...  
Er vered-gent he mamm ger, e velis Metik kez :  
Laouen oa evel ann deiz ha koant evel al loar,  
Biskoaz pen-herrez ker koant n'euz bet war ann douar.

Luguerni a re he zall, he diou chod gwen ha ru,  
He ginou, vel eur rozen, he bleo, he lagad du,  
Eur gross aour en he c'herc'hen, he c'hoef dantelezet,  
Lavaret 'vije eun eal euz ann en diskennet.

« O ! pebeus joa evidomp, va c'bloarek Gwenolé,  
 » En em gaout e Remengol, deiz pardon Mamm Doue,  
 » Mamm ann oll dud ankeuet, Gwenole, ma mignon,  
 » Evidout e peb amzer, he fediz a galon.

» Metik koant, setu aman, setu ar voalen aour  
 » A roaz d'in, arog mervel, Annaik, va mamm baour,  
 » Doug anez-hi war da viz, kemer-hi dihan-en,  
 » Me dou war goalen va mamm d'az karet da viken.

» Ar groz aour zo em e'here'hen a vo did, Gwenole,  
 » Eur guchen euz va bleo du a roan did ive ;  
 » War ar groaz se e touan ha dioug ar Werc'hez  
 » E vi karet gant Metik 'lec' ma vo e buez. »

Ha daoulinet en iliz, hon euz p'ed hor peden,  
 He roet evit ofrans, eur e'houriz koar melen.  
 Binniget hor medalen, poket d'ar relegou,  
 Da relegou Sent Breiz; karet gant hon tadou.

Goude hon eus baleet hon daou dre Vreiz-lzel,  
 Ha gwelet katz 'ilizou, katz a douriou huel,  
 Abbati Landevennek ha mox Douarnenez,  
 Lec'h ma oe beuzet kear Is hag ar brancez Ahez.

Gwelet hon deus Mene-Hom, hag iliz veur Kemper,  
 Mene-Bre, iliz Bulat hag hini Landregner,  
 Kastel Brest, Sant-Ian-ar-Biz, iliz Salaün ar foll,  
 Ha kaëra tour zo er bed, tour huel Kastel-Pol.

Gwelet hon euz Ker-Ahez, Kemperle Pont-n'Abat,  
 Fouenan, bro ar merc'hed koant, Gwengamp hag Huelgoad  
 Montroulez ha Lann-Huon, Krozon ha Lez-n-even,  
 Kallak, bro ar gourinbu, Kastel-hu, Rosporden.

Klevet on euz o krozal ar mor e beg ar Raz,  
 Biskoaz den n'han tremenaz eb santout aon pe c'hkaz,  
 Bet omp en enez Sizun, ou Heussa, Molenez,  
 En enez Vaz, er lodet, ive er seiz enez.

Eur bloavez omp bet eurus evel daou eal Doue,  
 E pep lec'h, pa hor gwelet, ann holl a lavare :  
 « Setu kloarek ar Rannou, eoun evel eun derven,  
 « Setu Metik, he vestrez, fresq evel eur rozen. »

- 4 -

## IV

Devez pardon sant Herbot, e kleviz eur c'helou,  
 En euz beuzet vo c'halon, en eur mor a zaëlou,  
 Gant he zad ha gant he mamm d'amm mestrezik Metik,  
 Ez oa choazel da bried eur pagan pinvidik.

Ar pagan ze oa diot, hep furnez hep skiant,  
 Ne gare war ann douar nemet ar gwinn-ardant,  
 Metik paour pa er gwele a grene gant enkrez,  
 Hogen, he zad oa dallet, allas ! gant ann danvez l...

Mont a riz primm d'he gwelet neuze da Gerzanton,  
 Dre ma tosiaen em c'hreiz, e krene va c'halon,  
 War dachen ar bourg o sôn e oa ar biniou,  
 Tud ann eured ha Metik beuzet en he daëlou.

Metik, a dreuz he daëlon, a reaz ouz-in eur sel  
 En eur lavaret : « Kouraj, Kouraj, mignon fidel !  
 Monet a ra en ilis, lavarat 'ra d'ar belek :  
 « Gwenole eo a garan, hag hen vo va fried !...

Koueza reaz d'ann dour, raktal ar benn-herrez,  
 Ha douget e oe dioc'h-tu euz ann ilis er mez ;  
 Dispak he c'hoef, he dillat, ha dispak he bleo ;  
 Seblantoul a re beza eua elik paour maro.

Mantret holl gant ar glac'har e koueziz dann daoulin,  
 En eur grial : « O Metik, sell a druez ouzin !... »  
 Pokat a riz d'he dornik, d'he diou chod, d'he c'here hen ;  
 O Metik ! Metik ! Metik ! Te p'hini a garien !...

Ann disesper en dro din, evel eur vantel blom,  
 A gassaz pell a c'honon, pell war zu Mene-Hom...  
 Va skiant a so kollet, va c'halon a so ien...  
 O Metik ! Metik ! Metik ! Te p'hini a garien !...

Eiz de goude, usezet e kreiz koat ar Rannou,  
 War va diou chod e rede diou feunteun a zaëlou...  
 Pa glevis e Remengol o sôn ann anter-noz  
 E lavariz eskamet : « Va Doue, deoc'h bennoz !...

« O Gwerc'hez vad Remengol, sellit oc'h va glac'har,  
 » Aman oun deut da vervel brema war ho touar,  
 » Varc'hoaz pa zavo ann heol arc'hantet en enno  
 » Dindan an derven goz ma, me vo kezet maro !...

— 5

« O Metik, va dousik koant, te p'hini a garien,  
 » Kenavo 'lavaran did er bed ma da viken !  
 » Gant ar maro unanet, ni c'hoaz en eum garo,  
 » Kenavo er baradoz, kenavo, kenavo !!!...

V

Ann de varlerc'h, da zao heol, eun durzunel hep par  
 A hirvoude en derven he c'hlemou a c'hlac'har ;  
 Ar c'hloarek a foa maro, maro gant ann anken.  
 En eur lavaret : « Metik te p'hini a garien !

Ar c'hloarek paour a starde, c'hoaz war he vuzellou,  
 Kroas aour ha bleo du Metik, glebiel gant he zaclou ;  
 War ann derven'n doa skrivet hano he garante,  
 Ha diou galon unanet treuzet gant eur c'hléze.

Kasset eo bet ar c'hloarek da vered Remengol,  
 Ha sebelliet e disheol iliz sakr Remed-oll,  
 Iliz Patronez he vamm en deuz bet ken karet !...  
 Tud iaouank-a Vreiz-Izel, p'p'dit 'vit-han bepret.

Setu eta Gwenole en he vele douar !!!...  
 Eur miz goude oa klevet huanadon glac'har...  
 Eur plac'hik gwisket e dû, e hered Remengol  
 Deut di da bedi Doue ha Gwerc'hez Remed-holl.

O tremen dre ar vered, velaz war eur men be  
 Skrivet neve flamm hano he mignon Gwenole,  
 Eprd ann noz daoulinet, Metik wele dourek,  
 Ha d'ar men be e poke, e poke kalonek.

« O Gwenole, eme-z-i, setu te o repoz  
 » E douar sakr Remengol ez out deut d'am gortoz,  
 » Mes kent ma tarzo ann de, o va muià karet,  
 » Er be man, dre zorn Doue, ni veza unanet !!!...

Da zao-heol eur belek koz 'vont, da bedi Doue  
 He c'havaz anter-varo, gourveest war ar men-bet,  
 Rei a raz d'ar plac'hik paour absolven ha pardon,  
 Metik a varvaz laouen, raktal, gant rann-galon !...

Erz eur vogeden ezanz ene gwen Metik kez,  
 'Vel eur goulmik, a nijaz d'ann en gant ann elez ;  
 Euz a varados Doue eur goabren arc'hantet,  
 War tour Iliz Remengol, neuze, zo diskennet.

— 6 —

War ar goabren ar Werc'hez ha Sent koz Breiz-Izel,  
 'Deuz kurunet Gwenole hag he vestrez sautel,  
 Barzel ann amzer gwechall, diant, war ho zeleannou  
 Da Zoue, e brezounnek, a gane ho gwersiou.

Sebeliat e korf Metik, kichen korf Gwenole.  
 Ar maro 'n deuz unnet ann eil gant egile..  
 Eur c'hloarek karantezuz 'n deuz war ho be skrivet  
 Ar c'homzou truezuz mun, gant he zaélou mesket :  
 « Aman e repos, e peoc'h, kloarek koat ar Rannou  
 » Den a feiz hag a galon, den a garié he vro ;  
 • En e gichen eo kousket penn-heréz Kersanton,  
 • Metik, ann alik Doue, maro gant rann-galon !!! »

O gwerc'hez vad Remengol, setu ho taou vuguel  
 Kousket e tal hoc'h iliz na dindan hoc'h askel,  
 'Vel eur Vamm garantezus war gavel he mabik,  
 C'hui dolo evez war be Gwenole ha Metik !!!

Kleier, ograou Remengol, truezuz c'hui zono,  
 Barzel ha pèlerinél, daélou c'hui a skuillo,  
 War be Metik, Gwenole, pa rafet ho peden,  
 Eur beden a garantez ha karget a anken !..

Bevit e doujanz Doue, tud taouank Breiz-Izel,  
 Pedit Gwerc'hez Remengol evit ma viot santel,  
 Sonjit ive e Metik, soujit e Gwenole,  
 Bevit evel d'ho fidel ann eil d'egile.

---

Koat ar Rannou, (Rann, Rannou, chants, séries), bois  
 des chants ou des séries. Koat braz e dero, a zo e kichen,  
 ha dar zao heol da iliz Remengol. Ann Drouiset, beleien  
 ar Vretonnet, gwechal c'hoas difeiz a droc'he, bep bloaz,  
 gant eur gontel aour, e koat ar Rannou, eul louzaouen,  
 hanvet huelvar, p'hini a zao war ann dero.

Barz, barzel, (barda, poëte). Bep bloaz ive enem gave e  
 koatar Rannou hag e Remengoulou, hirio hanvet Remenglo,  
 Barzel ann Arvor. Ar re ma a oa tud a skiant pere a gane  
 gwersiou great gant ho, war ann traou kaer erruet er vro,  
 kana a rent ive meuleudi Teufntès, Doue faoz, p'hini a oa  
 enoret ell eac'h e ma brema iliz Remengol. D'ann hini vije

hanvet Barz e roer eur garunen dero hag eun delen aour,  
war p'hini ar Barz a gane he soniou.

Gwenkhan, Marzin, Taliezin, a oa barzet e Breiz-Izel kent  
m'a teuaz en-hi ar feiz kristen. — Breman zo c'hoaz e Breiz  
kalz Barzet, pere laka ho studi hag ho foan evit kendere'hel  
en hon touez ar feiz ha iez hor bro. Er penn kenta eus ar  
barzet e ma ann Aviel ; Troude, barz ar vugaligou ;  
Kemar, person ha barz sant Laurans ; ar Iann, barz Keat-  
ann-Noz ; Milin, barz Laouenan Breiz ; Ransou, barz  
Roc'h-Allaz ; Joubiou, vikel vras a eskopti Gwenel, barz  
sant Gweu-Eal ; ann abad Klec'h, barz Rungolven ;  
Kaourintin Thomas, barz ann Tour-Tan ; Prosper Proux,  
barz Kerne ; ann Hegarad, barz Plouek ; I.-P.-M. ar  
Skour, barz Itron-Varia Remengol ; F.-M. ann Huel,  
barz Ker-ar-Born ; Olier Souvestr, barz Plouian ; ann  
abad Poullaouek, kure Landevennek, barz sant Gwengle ;  
Karis, person Plougras, barz Mene-Bre ; Guernisson,  
barz Keravel, ha kalz a re all, pere o deuz gret eun niver  
bras a werziou ha soniou kaer.

- « Kanit anez ho, Breiziz, rag beza int gwerziou
- « Gret gant skiant ha kalon ha gant gwel vad komzou.
- « Gret int e brezounek mad, nan e koz vrezounek,
- « Evel ar re zo kalz re e brezounek-gallek. »

Barzet ha pelerinet, kanit gwerziou santel,  
Kanit gloar ha meuleudi da vamm tud Breiz-Izel,  
Ho Mamm hag ho Pafrones. Rouanes ar bed oll,  
Mamm ann dud paour, ankeniet, Gwerc'hez vad Remengol.

## I.-P.-M. AR SKOUR,

Barz Itron-Varia Remengol.

Propriété : LESCOUR.